

Da Vemor
Ar Gouidec,
Da behini e zeus savet eur bez
e Konk,
elec'h e zeo laget e relegou,
d'ar sul, 12 eus a vis Here 1845.

(41, suite)

Seiz vloas zo en deiz-mâ, hor mignon Gouidec,
Ar gwiziek a den en hor ies Brezonec,
Goude pemp mis gouzanv a rentas e ene,
Evel eur gwir gristen, etre daouarn Doue.

Eur c'hoant vras hor boa oll ma elje dont euz deiz
E gorf paour da vezia en hor brö ger a Vreiz;
Hor c'hoant zo notreet, hervez m'er goulennemp;
Mignonet a Paris zo deut d'en digas demp;
E relegou, hirio, goude oll daskoret
En e vrö ger a Konk, el lec'h ma voe ganet,
A ya da arzigoi. E genvroiz eno,
Evel gwir gristenien, evitan a bedo.

(42)

Endra pad e vuez e tle feb gwir Kreton
Kout memor Gouidec e gweled e galon;
Rak dezän e bleomp talvoudegez ar reiz
A velomp zo hirio er ies ger eus hor Breiz.

Breiziz! unanomp oll hor pedennou brêmâ,
Stouët var hon daoulin amâ var ar bez-mâ,
En pini eo laget korf paour hor mignon ker,
Hak a greiz hor c'halon pedomp oll hor C'hrouer
Da zont da zic'haoui eus eur vuez poannius
Eun den a voe ker mad ha ker karantêzus!

Hirio e velomp mad fegement eo eürus
Beza remet atao eur vuez ventuzus.

(43) Sellit hor bèleyen hac hor c'henta pastor
 O renta d'hor mignon an diverza enor,
 Dre o c'hanvou a goun etrezek hak an ée,
 O pedi eritân madelez an Doue.
 Unanomp hor feden gant re e vinistret,
 Hak eus eur gwir glac'har bezomp oll treantet.

N'eo ket d'ar brasderiou, na ken-nebent d'an aour
 E renter enoriou (Gonidec a voa paour);
 Mes d'an den gwiziek, d'an den leal kristen,
 Na vo ankounac'hêt gant nep Breiziad biken.

Evit dont da gendelc'h atao en feb Breton
 Demeus ar Gonidec memor en e galon
 Eur men-hir var e vez a zo brêmâ savet,
 Var behini e zeus gant eves bras skrifet:
 « Pevhen, diskid d'an oll hano ar Gonidec,
 » Den gwiziek ha den fur, tad ar gwir Brezonek. »
 Ha neuze, izelloc'h, var eur men all e vo
 Ar geriou-mâ skrifet ivez e ies hor brô:
 « Ganet é Konk, 4 miz quengôlô, 1775.
 » Maro é Paris, 12 miz here, 1838.
 » Bezjet é Konk..., an 12 eus a vis here, 1845. »

(44) Eur niver bras a dud eus a bep korn ar vro
 D'ar zul, daouzek here, en em gavo eno
 Evit pedi Doue var bez ar Gonidec,
 Enor demeus hor Breiz, reizger ar Brezonek.

Unani rân amâ va feden gant ho re,
 Mignoned Gonidec, a weled va ene;
 C'houi pere ell hirio peur-ober ho tlead
 Var bez eur gwir Breiziad, mignon fur ha dey mad.

D'am c'halon e vije eur freabzidiger
 Ellout monet ivez da bedi var e vez;
 Hogen pa ne ellân, nôs ha deiz em speret
 Hano ar Gonidec an bo bezand bepret.

10 here, 1845.

Eur Breiziad. A. Lédan.

(Vol. VII, p. 41-44.)